

YF_0122_An Durzunal

Kalz amzer am-eus kollet o furchal er c'hoajou,
O klask tapout un durzunal kousket war ar brankou

Devet am-eus ma amors ha tennet am-eus fall,
Achet an durzunal ha nijet d'ur c'hoad all.

Diouz an noz hag ar mintin e klevan al lapoused,
O kana, o fredonin, da veg ar gwez pignet,

Ma n'eus nikun anezo hag a bik ma c'halon,
Evel mouez un durzunal o ouelan d'he mignon.

Hirvoud a ran nozh ha deiz gant ar boan ha glac'har,
Evel eun intanvez paour kollet ganti e far,

Ma n'eus nikun anezo hag a bik ma c'halon,
Evel mouez un durzunal o ouelan d'he mignon.

Petra turzunal yaouank a dourmant da galon ?
Kollet am-eus, emezi, va fidelan mignon.

Ma na zeu ur chaseour d'ober din-me mervel
Me a varvo gant ar glac'har da va mignon fidel.

N'eus na zouten, na remed na konsolation,
Kapabl da zont da galmi tourmanchou ma c'halon

Trec'het on gant ar glac'har, mont a ran da vervel
Mes ne varvin ket kontant ma ne varvin fidel.

Gwelet am-eus o vervel an durzunal yaouank
Dizec'het oa ma c'halon gant ar boan an tourmant

En-deus c'hoaz repetet "Ha ma mignon fidel
Mont a ran da vervel" raktal eo tremenet.

Melezour skler ha brilliant deus ar fidelite
Ar model ar sinseran deus ar gwir garantez

Nann, ne varvin ket kontant ma ne varvan fidel
Birviken ne zizonjin marv an durzunal.